

**YF\_0041\_Pardon Koloreg**

An deiz all bet e oan bet e pardon Koloreg  
Me am-boà gwelet ma mestrez war skalier ar vered

Evit mont d'he saludiñ na ken kaer evel ma oa [m'oa hi]  
Me a c'houlennas diganti ha dimezet e oa [hi]

N'on ket c'hoaz ma servicher, n'on ket c'hoaz dimezet  
Met bed on eur fortun vat d'an hini ma c'hemerfe

Me am-eus er ger e ti ma zad pevar garr houarnet  
Ha kezeg er marchosi kapab d'o charreat

Met pa oan erruet eno me ne welen netra  
'met eur c'hoz kaz bihan fall n'oa ket evit logotañ

Daou wele a oa ivez, un a bep tu d'an tan  
Al liñseniou a oa warno, n'oant ket deuz ar re voan

Al liñseniou a oa warno, n'oant ket deuz ar re fin  
An nozvez kentañ am-boà kousket am-boà kignet ma daoulin

Bremañ me a jecho micher, yelo da wiader  
Ha lako war ma gwele liñseniou lien ker

Ha lako war ma gwele liñseniou lien fin  
Ha pa'z in me da gousket, ne gignin ket ma daoulin

M'ho-peus c'hoant da c'houzout piv en-deus kompozet ar zon  
N'ho-peus nemet mont d'an "Toull Zab", ez oc'h sur d'o c'havout

bed on = bez' ez on

L'autre jour je suis allé au pardon de Koloreg  
J'ai vu mon amie sur les marches du cimetière

Pour aller la saluer tellement qu'elle était belle  
Je lui demandai si elle était mariée

Je ne le suis pas encore mon serviteur, je ne suis pas mariée  
Mais je suis certainement une bonne fortune pour celui qui me prendrait  
J'ai chez moi dans la maison de mon père 4 chariots ferrés  
Et des chevaux à l'étable capables de les tirer

Mais quand je suis arrivé là-bas moi je ne voyais rien  
Sauf un vieux mauvais petit chat qui ne voulait pas courir après les souris

Il y avait deux lits aussi un de chaque côté du feu  
Les draps qui étaient dessus, n'étaient pas parmi les minces

Les draps qui étaient dessus, n'étaient pas parmi les fins  
La première nuit que j'ai dormi j'ai écorché mes genoux

Maintenant je changerai de métier je serai couturier  
Et mettrai sur mon lit des draps de tissu cher

Et mettrai sur mon lit des draps de tissu fin  
Et quand j'irai dormir, je n'écorcherai plus mes genoux

Si vous voulez savoir qui a composé la chanson

Vous n'avez qu'à aller au "Toull Zab", vous serez sur de le trouver